



Raktres c'hoariva KEAV 2023

✓ *Ar c'horf hag ar vouez*

Araok kregiñ da c'hoari e ranker kemer amzer da zistignañ ar c'horf. Er vuhez pemdeziek e vez lakaet bec'h war an den, war e gorf. Neuze e vo kemeret amzer da sioulaat ha da selaou ar c'horf dre pleustradegoù Qi Gong evit mont e darempred gant hon diabarzh deomp-ni. Peurachuet e vo al labour gant ar c'horf a drugarez d'an dañs a sikouro ac'hanomp da gaout skiant eus an egor tro-dro deomp hag eus korfoù an dud a vo a-gevret ganeomp-ni war al leurenn.

Pouezus-kenañ eo alaniñ mat. A-drugarez d'an alan e c'heller implijout mat ar vouez hag ar c'horf.

✓ *Ar c'hoariva-skeudenn (le théâtre image)*

Ar c'hoariva skeudenn a sikouro pep hini da vezañ en e aes war al leurenn, da c'hoari da vat ar pezh a zo don en e galon, da vezañ dres d'an ampoent evit santout ar fromoù, da vezañ war evezh e pep mare ha da vezañ kad da c'hoari war ar prim. Pleustradegoù a vo diazezet war an alan, ar selaou hag ar selloù.

✓ *Ar skritur*

Lennet a vo testennoù ha barzhonegoù ha tamm-ha-tamm e vo skrivet hag ijinet istorioù berr ha divizoù ganeoc'h. Al labour gant ar c'horf, gant ar vouez, gant ar selloù a vo un digarez evit pep hini da ijinañ ha da skrivañ.

Ul labour a-stroll eo ar c'hoariva : ober anaoudegezh gant ar re all, kemer plijadur, ha kaout doujañs dreist pep tra. Ret e vo dont bemdez ha chom betek ar Gwener noz evit an abadenn.

Petra zo da zegas ?

- **Dilhad da bemdez sklaer pe gant livioù : bragoù pe sae pe vroz, hiviz pe roched pe tee-shirt, un tog, danvez, ha dafar a bep seurt. Lakaet e vo an dilhad-se asambles evit ober ur gwiskva a-stroll,**
- **Botoù du skañv pe botoù dañs,**
- **Un tapis, ur c'haier hag ur c'hreion.**